

Diell 1 : *Kefridi Jakez Karter a-berzh ar roue*

« [Karter a rank] beajiñ, dizoleiñ hag aloubiñ, ha kavout dre an hanternoz an hent da vont betek Katai¹ ; [a ranko mont] eus hor rouantelezh betek an Douar-Nevez evit dizoleiñ enezennoù ha broioù zo ma lavarer ez eus kalz a aour ha pinvidigezhioù all. »

Lizher *François I^{er}*, roue Frañs, meurzh 1534

In SEDRAP, *A nous le monde ! CE2.*

¹ *Katai* zo un anv a veze roet da Sina er Grennamzer hag en Amzerioù Modern.

Diell 2 : « *Taolit d'al laez !* » *Ar veaj kentañ*

« Goude bezañ skrivet o zestamantoù ha bezañ klevet an oferenn e sav an ergerzhourion o gouelioù d'an 20 ebrel 1534. Gant avel a-du ez int kaset d'an Douar-Nevez dindan ugent devezh ha d'ar 27 mae en em gavont e strizh-mor ar C'hastelloù (Strizh-mor Gerveur)¹. Met an amzer fall, « kalz a skorn », a vir ouzh o listri a vont war-raok. Sizhun gentañ mezheven ez a tre Jakez Karter er Bae Bras hag en dianav. »

Philippe Jacquin, *Les Indiens blancs. Français et Indiens en Amérique du Nord, XVI^e-XVIII^e siècles*, Payot, 1987

¹ Ar strizh-mor etre an Douar-Nevez ha Labrador.



Diell 3 : *Eil beaj Karter e 1535*

E 1535 e tizolo Jakez Karter enezennoù ar stêr Sant-Laorañs, e Kanada. Setu pezh a gont :


« An enezennoù-se eo an douaroù gwellañ hon eus gwelet biskoazh, goloet int gant gwez bras, pradeier, maezioù leun a winizh¹ egras² enno hag a biz a oa e bleuñv.

An deiz war-lerc'h e teuas darn eus an dud ouez e nav eus o bigi bihan, met kerkent ha m'o deus gwelet ac'hanomp o deus tec'het diouzhimp en ur ober jestroù da ziskouez e oant deuet da drafikañ ganimp, o tiskouez krec'hin a izel briz a wiskont ; ha ni a rae jestroù da ziskouez ne felle ket dimp ober droug dezho. »

Jakez Karter, Danevelloù beaj,
In Nathan, *Gulliver. Histoire. Cycle 3*, 1997

¹ gwinizh : ed.

² egras : gouez, nend eo ket bet gounezet gant an dud.



Diell 4 : *Hochelaga a zeu da vezañ Montreal*


« Reñ a rejomp d'ar menez, Menez Real (*Mont Real*)¹ da anv. Ront eo ar menez, klozet gant ur peulgaë koad ; en diabarzh ez eus hanter-kant ti war-dro hanter-kant paz o hed, pe hiroc'h, an holl anezho graet gant koad, goloet ha kinklet gant ruskennoù bras. E-barzh an tiez ez eus ul lec'h bras war al leur ma reont tan ha ma vevont holl a-stroll, ha goude-se en em dennont en o c'hambroù, ar baotred gant o bugale hag o gwraez. »

Jakez Karter, Danevelloù an eil beaj

¹ Da lavarout eo Menez roueel, Menez ar Roue.

In Hachette, *A monde ouvert*, Istor, Kelc'hiad 3, live 1, 1996

Diell 5 : *An trede beaj*



Charlesbourg-Royal bet savet gant Karter a-raok distreiñ da Frañs. Deuet eo da vout kêr *Cap-Rouge* bremañ.